

C'est Jean Jézéquel mécanicien à St Pol  
et vedette du moteur Bernard, qui

# Ar moteur Bernard

m'aurait dit q'de lui faire une chanson pour son  
moteur Bernard  
faucun avant la guerre

## I

N'o peuz ket klevet c'hoaz paysantet  
Ar pez zo evidoc'h digasset  
Rak mankout a rea war ar meaziou  
An dra-ze d'ober ho labouriou.

## II

Eur moteur eo, unan dispar  
Hag a zo hanvet moteur Bernard  
N'o peuz ket c'hoaz gwelet ar seurt-se  
Kiriuz eo, penaoz e vale.

## III

Barz ar parkeier hag er grenchou  
Eo mad d'ober peb seurt labouriou  
Ganthan ne zeuz tam danjer ebet  
Nan, par dezhan ne vo ket gwelet.

## IV

Gallout a reer e ber amzer  
Chench plas dezhan, n'eo ket pounner,  
Kass ha digass c'heller anezhan,  
Eur blijadur eo labourat ganthan.

## V

Pa erru poent ar mekanikou  
Eur moteur Bernard war al leuriou  
Kredit ac'hanon, e ber amzer  
E vez kasset an eost er zolier.

## VI

Gwelit penaoz ar voulanjerien  
Deuz breman echu ho finijen  
Araok e vezent kazi en noaz  
P'errue ar poent da derri an toaz.

## VII

Breman eur moteur en ho c'hichen  
C'hellont ober eur varvailhaden,  
Gellout c'hellont ive diskuiza  
Ar moteur ra al labour ar goassa.

## VIII

Gwelit en anv an aviatourien  
A vez bemdez en huel o pourmen,  
Dizoursi braz e vez ho speret  
Rag klevet vezont o lavaret :

## IX

Eur blijadur eo beza en huel  
N'or beuz ket aoun. vuz glav nag avel  
Abaoue m'hor beuz eur moteur Bernard  
Ne gouezomp ket buan d'an douar.

## X

Evelse e velit paysantet  
Gant an oll ar moteu zo meulet  
Jomit ket da nec'hi, prenit unan  
Kountant braz e vezoc'h anezhan.

## XI

Kaout a reoc'h re vad e Kastel  
Ti ar mekanisian Jean Jézéquel  
It d'an ti, ne vezot ket tromplet  
Traou mad d'eoc'h a vezo gwerzet.



(Reproduction interdite).